

# DEVEZH KENTAÑ

## *Prolog ar c'hentañ devezh*

Didostait ma Broiz, tud vat a Vreizh-Izel  
Ma klevfet-hu timat marvailh ha rimadell  
Diwar un dimezell - evel ma vo gwelet –  
Hag a vezo kalet ha kriz he flanedenn.  
Dre benn d'ar garantez he devo buhez tenn.  
He mojenn penn-da-benn a veze telennet  
**A** rumm da rumm, hep mar, gant ar gwellañ barzhed.  
Mard eo<sup>10</sup> ho madelezh ho pezo gounezet  
An aotre d'he c'hlevet hep dale ebet ken.  
Nend eus neb den a-grenn gouest da gompren enni  
– met e ve e galon barr gant ar gasoni –  
Pa brederfe warni noz-deiz betek biken  
**Na** c'houlennfe ar c'hras m'he defe an daspren  
Eus he holl bec'hedoù. Ra gavo gwir souten  
A-berzh Roue-an-Glen ha rikour d'he ene.  
Rak e-keñver **Tristan** e vage karantez,

---

10 Pa vez skrivet « eo » gant un « o » stouet neuze e ranker lenn ar soniad « é ». En hevelep doare ez eo bet skrivet « deuet » pe deut » hervez an ezhomm ma oa da gaout un troad pe zaou.

Ur garantez disi hep tamm fallagriez, h,  
He desache divezh da vonet d'e geze.  
**Met** piv he zamallfe ? hag ur pec'hed e ve ?  
Bout zo bet, din da c'hoût, merc'hed all he goude  
A vanas dindan bec'h gant hevelep pec'hed.  
Ar garantez a zo ur santimant onest  
A c'hounez ur galon en he fezh, hep kontest,  
A lak niz ha mestrez, kar-nez ha n'o lez ket.  
**Izold** ar Rouanez a vez anavezet  
Dre he blev melen kenkoulz hag he c'hened.  
Ur vlevenn alaouret, a eure, a gredis,  
Da Roue Tintagel karout ar femelenn,  
Honnezh heñvel hogos deiz-noz ouzh ur rozenn,  
Ma kasas betek enni, dizale, e niz.

Degemeret gant ton 'voe gant Iwerzhoniz  
Rak m'en devoa **Tristan** lazhet un Aerouant kriz  
Ha goulennet 'vel priz tra met dorn flour **Izold**.  
Ma teujont o daou 'vel gwir amouroused  
E kastell Tintagel, primañ m'o doa gellet  
Goude bout siellet ent-kuzh ouzh ar bed-holl  
**Ur** garantez dispar o lakay en argoll.  
Abalamour d'un died n'o devo neb digoll  
Hag e teuio an holl, ('vel ar mor dirollet  
Pa zeu krenn da skubañ naet e-kreiz ar goañv yen  
Diwar kerreg Pennmarc'h neb a ya diarc'hen)  
D'o lakaat e anken, en digenvez, pened.  
**Gant** ur re didrugar, a vo er fin barnet,  
Int o devo hañv-goañv poanioù bras gouzanvet.  
Met ne damalled ket dezhe o fec'hedoù.  
Doue madelezhuz ha den hen abuzfe ?  
Lenn a ray Mestr-an-Glen Melezour o Ene,  
Ma vefont disammet a walenn an diedoù.

Nemet, hed o buhez hag e-pad bloavezhioù,  
Tomnder pe yenijenn, brein-put o goulioù,  
E chomfont amoureux hep teuler pled ouzh nep.  
Trefuet o spered, evel e Liorzh Eden,  
Dibreder a bep tra, disoursi a bep den,  
Digas ouzh henn-mañ-henn, savet en o enep.  
**Ar** garantez, hep mar, a zo-hi tra mar rep,  
Hag evel ma weler amzer domm, amzer c’hlep,  
An Delenn ’teu hep mar he goude ar Rebed.  
Met ouzh ar garidi Doue na ve digas  
Hag e chomont bepred difazi en E c’hras  
Ha pa vefent siwazh er bed-mañ gwallgaset.  
**Didostait** ’ta afo Kenvroiz me ho ped,  
Ha gwellikañ ma c’hell e vo dezrevellet  
Ur vojenn gaer meurbed, n’eus kaeroc’h egeti.  
Evit ho tidual, ho fromañ ma c’hallan,  
Da heul kalon **Izold**, da heul kalon **Tristan**,  
Deomp bremañ tuchant, na zaleomp ganti.  
**Emaint** ’barzh ar werjez, deut an noz anezhi,  
**Izold** a zo pedet, piv ’zo deut daveti ?  
Taolit pled bras **Tristan**, bezit en disfiziañs !  
C’hwi a zo en arvar a vonet ouzh ar groug  
P’en em gav tud infam da vont di d’ho ambroug,  
E-barzh ’n o c’halon vouk n’eus mann nemet droukrañs !

## *Amañ ez teraou istor Tristan hag Izold.*

*(Emañ ar Roue Marc'h kuzhet e-barzh ur binenn vras. Gwelet eo bet gant Izold)*

### **Izold a gomz**

« **Tristan** ? c'hwi eo hep dout ! ha n'ho peus tamm doujañs ?  
Ouzh ma gwaz, hoc'h Aotrou, ho Mestr hep neb douetañs ?  
Sed aze un ofañs her lakay nec'hañsus  
Pa gredo ez omp-ni hon daou karidi.  
Tamallet 'vo dimp-ni magañ ingratiri  
Ouzh e veg, en e di, ha bezañ diegus !  
**Rak** an holl ma laka da vout a-grenn kablus  
Da vout ganeoc'h bemdez, tener, karantezus,  
Ha dont da abuziñ gant santimant kuzhet  
Ho Roue, ma Aotrou, en ur vout avoultrez.  
Ya, me ho kar **Tristan**, met evel Rouanez,  
Rak karout pep kar-nez eus ma gwaz 'm eus desket.  
**Marc'h** a ve simudet ma vefe divrudet  
Palamour din-me e diegezh peurgetket,  
Ma vije mezhekaet e sammjen pec'hedoù.  
Ma lezit, me ho ped, mont a ran davetañ.  
It a zirak ma dremm, it prim kuit alemañ  
N'eo ket ho plas amañ, mougít glac'har, kañvoù,  
**Gant** aon e tivemprfed war ar rod ma memproù  
Da heul tamalloù lous a vanfe dilousoù.  
Rak Marc'h, gwashat amprou, ma'm c'hlev o komz ouzhit,  
En devo mui a gred 'barzh ur re o c'hedal  
E teufen, dre ho faot, el lez da strebotal.  
Neuze, it kuit gant mall, ar pellañ ma c'hallit.  
**Na** vez ket langourous pe me a ya diouzhit  
Rak te az peus bet pelloc'h hervez da zellid,

Poent eo dit monet kuit pe me 'ya d'az kuitaat.  
Panevese me gred e teufe davedon  
D'am lazhañ didrugar pe korrige pe baron,  
Aet on ma mignon, n'an ket da zifonnaat ! »

### **Tristan a gomz**

« **Izold** ho pet truez, na zeuit d'am diaesaat.  
En an' Doue-an-Tir, chomit tamm hep hiraat  
Ur vuhez ken divat gant ur boan ken padus.  
Pa n'hallit ma sikour ha me ken dibourvez  
Diverrit ma amzer, ma lammit a gernez.  
Setu me diharnez en ur stad gwall vezhus  
**Ma** rankan kuzh-ha-kuzh, ha me bet vertuzus,  
Dont d'ho kwelet leal gant un afer mallus.  
Marc'h, am lakae a-us d'ar re all 'n e guzul,  
En deus ma argaset, na 'm bez tra ebet mui  
Digant Roue Kerne, me, diwaller e di  
A-enep den pe mil hag i kriz divuzul !  
**Ar** Morc'hold a Iwerzhon, kreñv evel Herkul,  
Daoust piv en tagas pa yae an holl a-gul ?  
Gras din e oa bet nullet, kaset da ul lec'h  
Ne retornfe nikun ha pa ve dihunet  
Gant galloud un Doue ! Met na vo aotreet  
Rak ma ve dasorc'het, neuze 've gwelet bec'h !  
**H**ogen ne voe hini a'r varoned dinec'h  
Panevet da **Dristan** e kemerent an tec'h  
'N ur lezel kreiz ar bec'h tud yaouank dibec'hed,  
Tonket a vout kaset d'an harlu, hep ket si,  
Hep sikour da c'hortoz eus o re, tud o zi,  
Sklaved en Hiberni, blin ha daoulinet.  
**Na** c'hwi tud digalon, marc'heien, baroned,  
Dre ho pileni Marc'h en deus ma dislâret !

Penaos e ve gellet 've lakaet er bed-mañ  
 D'am c'harout a-nevez ? **Izold** ma ouvezit  
 An tu naet plaen-ha-barr d'e gendrec'hiñ, lârit !  
 Rak, **Izold**, ma n'en grit, ne vin mui evitañ  
**Met** un trubard siwazh, unan a'r re washañ.  
 E waz ez on padal, an hini fealañ.  
 Ma vez lakaet gantañ ma enor e brañsell  
 Penaos e oufen-me chom pelloc'h en e vro ?  
 Ma vez ouzhin digar, dishegar ha garv,  
 Ne vin mui e neb tro, ha ken na vezo pell,  
**An** hini karetañ el lez, e Tintagel.  
 Ma, beuzet e kañvoù ez in d'ar broioù pell.  
 Daoust penaos e c'hellfen padout evel-henn,  
 Divadoù, diharnez, o c'hoari ar c'hleze ?  
 Ur marc'heg dizouar e vez trist e zoare.  
 Hep souten ur Roue, 'vel ur marc'h dieren,  
**Nend** eo mui netra pa n'eo mui tra da zen !  
 Setu ma zonkadur, **Izold**, hiviziken.  
 Met gant ur ger hepken, klevet eus ho kenoù  
 E teuio diardoù a dra sur ar Roue  
 D'am fardoniñ ken aez ha tra ha marteze  
 Am bo tro adarre da vevañ 'n ho metoù ? »

### **Izold a gomz**

« **Hag** e vefen ken kreñv dindan bolz an Neñvoù  
 Da lakaat ur Roue da sentiñ d' ho hetoù ?  
 N'eo ket deoc'h da c'houzout 'vez an holl gourdrouzet  
 Rak kement-se hep dout ne c'hell den ho souten !  
 Neb ho kuzhfe 'n e di a gavfe gwall zibenn.  
 Marc'h d'ho nullañ a-grenn hep mar a zo mennet.  
**Ouzh** noblañs pe vilen, groñs, en deus difennet  
 Da reiñ deoc'h-hu bod, gant den ne vec'h lojet,

Ha pa c'houlenfec'h boued, boued a ve nac'het deoc'h.  
Penaos e oufen-me reiñ deoc'h ho mennad ?  
An holl a vez el lez, bemdez, ouzh ma mesat,  
Din-me n'e0 ket ebat hag e vennit gwashoc'h ?  
**Rak** ma ouifed, **Tristan**, am eus komzet ganeoc'h,  
Ha, p'ho peus ma fedet, bet o vont davedoc'h,  
Ne vent seizhdaletoc'h o kregiñ ennoc'h-hu.  
En hevelep doare e vefen ereet  
Ha kaset, klañv pe yac'h, da vezañ toullbac'het  
Barnet ha kondaonet, malet naet 'vel ed-du,  
**Sur**, a-wel d'an holl dud 'ven troet e ludu.  
En anv sakr Doue, it kuit, hep dale mu !  
« Ar pardon » em'it-hu ? poent e0 deoc'h dihuniñ !  
An daou ac'hanomp 've kentoc'h mac'homet.  
Adeo 'ta **Tristan**, re hir ez on manet,  
Ne vennan ho klevet, na muioc'h ho krediñ ! »

### **Tristan a gomz**

« **O** ! komzoù ken dibar a zeu d'am glac'hariñ !  
**Izold** ! neb n'ho anav a zeu da abañ...  
Ha me o vizeriñ, ma holl vadoù riñset,  
N'am bije da spial met pozioù divalo ?  
C'hwekoc'h 've din hep mar poan c'harv ar marv,  
Ma c'halon 'zo dillo ar wezh-mañ peurroget ... »

### **Izold a gomz**

« **Moug**it war ho klac'har, bras a-walc'h e0 ar bed,  
Labour 'vo d'ho kleze, 'vihet ket dilezet... »

### **Tristan a gomz**

« P'ho peus ma argaset, ne 'm eus tra da c'hedal... »

## Izold a gomz

« Tavit din ! kenavo, ne yin ket mui d'ho kê.  
Trawalc'h 'm eus ho kwelet, mont a ran d'am gwele  
Gant ma gwaz, Ho Roue, da gousket c'hwek e-tal... »

## Tristan a gomz

« **A**et eo ... na me ? dilezet, kaset da gestal...  
Ne 'm eus keneil er gêr, panevet Gouarnal !  
Setu ur rozenn all 'zo plantet em c'halon.  
Na gwashat ur finvezh, pezh dizenor mezhus !  
Deut a-lamm d'am ziegezh gant ur plac'h orgedus  
Am lak gant he refuz war hent an aluzon.  
**O** ma Roue, ma Mestr, na don eo ma eston.  
Ha ned eus den e Breizh na rannfe 'n e greizon  
En antier e galon ? na ne ve estonet  
Ouzh ma gwelet aze hep arm, hep marc'h, hep den ?  
Sell, dirakout, **T**ristan, n'eus tra nemet anken ...  
'Vit ur wezh da viken da baour ez out rentet. »

*(Mont a ra Tristan kuit d'e dro. Emañ bremañ ar Roue Marc'h  
e-unan penn. Kounnaret eo. Emañ o komz outañ e-unan)*

## Ar Roue Marc'h a gomz

« **F**eiz ! pebezh genaoueg ! te zo diseiteget !  
Pa oas touellet, espoell, setu te didouellet !  
Nag ar c'horr milliget-hont ez in davetañ  
Da gas dezhañ d'ar gêr torzh-vara e verit.  
Bez e vo digollet eus e boan. Ya, redit  
D'ar pimperlamm, hastit, doujit a itrikañ  
**M**uioc'h, Frosin, mabgast, me 'ya d'ho tic'hastañ !  
D'ho kwalc'h, pitaouer koant, e yan d'ho tic'hoantañ !



Deus buan er c'hadañs m'az po tro da zañsal  
 E koroll an Ankoù. Gantañ 'vin dic'haouet  
 A'n drouk az peus graet din. Te en deus rivinet  
 Ma brud vat. Mezhekaet on. Gant mall, 'yan da bledal,  
**Kozh** korrig, ganit, set, n'az po mui da c'hedal  
 Tra met ar marv kriz da baeamant d'az vis fall.  
 En tan ! e-kreiz ar sal ! kerkent ha ma c'hallin,  
 Spazhet 'vi didrugar ha staget ouzh ar groaz  
 Kignet ha digignet, gwenn da eskern aet noazh,  
 Ha da gig kent henoazh servijet ent-poazh din !  
*(Emañ Marc'h o soñjal e Tristan hag Izold)*  
**M'**ho ped d'am fardoniñ a vout bet ken indin  
 Gant Frosin, ar c'horr vil e oan en amzivin.  
 Met C'hwi, Aotrou Divin, C'hwi eo a zivinas  
 E oant-i divlam holl hag e gaou kollet.  
 Aotrou ho pet truez pa 'm eus o dilezet  
 Rak i, evel bepred, gant Feiz gwir Ho pedas.  
**Paourkaezh** niz, hep ket si, 'oas distoket siwazh,  
 Dre-benn alioù fall ha diwir am dallas,  
 Gevier lous a vogas em c'halon, em askre,  
 En ez keñver, **Tristan**, tan c'hwek ar garantez !  
 Hogen hiviziken, den, keneil pe hentez  
 Na vezo mui diaes palamour d'ar re-se.  
**Kuzulierien** c'hourvennek ! ha c'hwi a vennfe  
 E kasfen en e roud an niz prop a'r Roue ?  
 Ne vo ger ken a se, e c'hellit ma c'hrediñ.  
 Na 'm bezo mu disfiziañs ez andred **Tristan**,  
 Neb a venn da gas kuit ? oute ne rin mui van,  
 'Vit ar gevier patant a ouzont invantiñ !  
**Rak** ma vijec'h, pilpous, deut da amourousiñ  
 Neuze ho karantez 'm be gwelet o kreskiñ  
 Hag o reneveziñ ; daou gorf o fiñval  
 Komzou flour 'n ho kenoù 'vel da ziv goulmig,

Kof-ha-kof, stok-ha-stok, un daou pe dri fokig  
 Gant selloù hegredik ha ken sederik all !  
**Keuz** bras am eus, me en tou, a vout bet ken fall  
 En ez keñver **Tristan**, ha da zigoll gant mall  
 A vennan hep termal. Deus en-dro em salioù,  
 Hag em c'hambr, ma'z po lemm ar gwellañ degemer  
 Gant **Izold**, ma weli, hep na ve tamm difer,  
 Penaos dit, dibreder, e vo 'vel en deroù ... »

*(Mont a ra ar Roue Marc'h kuit d'e dro. Frosin, eus e du, en ur lenn  
 e-kerzh ar planedennoù hag ar stered a welas penaos e venne d'ar Roue  
 Marc'h e gastizañ.)*

**H**ogen e-keit-se Frosin en doa keloù,  
 En ur lenn er stered hag er planedennoù,  
 Penaos garv ar Roue Marc'h en gourdrouze,  
 Ma kavas gwell gantañ, monet alemañ, prim,  
 Pa 'n em gave lostek ha kablus. Rak e grim  
 Euzhus abominabl, den mui n'e istime.  
**H**a pa ne oa mui gour er bed n'e sikourfe,  
 'N em denn a eure lemm e-barzh en Bro-Gembre,  
 Gant aon rak ar Roue, ma teufe d'e geze.  
 Klask warnañ 'voe savet, hag hennezh ha bet frank,  
 E c'heller lavaret, pelloc'h, ne voe ket stank  
 Ar c'havet rak hep mank bepred e tianke.  
**A**balamour d'ar c'horr, Marc'h, krenn, a fulore.  
 Ne gaved e neb kêr, en Breizh pe en Kerne,  
 Ar c'horr milliget-se, kaer a veze d'e glask.  
 Hag **Izold** a vire sielet en he skrin  
 Koun sin karantez he mignon koantig e vin  
 He nez-kar, he hini karetañ, ent-dinask.  
**B**etek he c'hambr, kredabl, ez eas, ent-habask,  
 Trubuilhet ha distur he c'halon, en ur wask.